

Tall ar gwen.

— Divis en tra c'hozh hag en bonten Koad.

90
-105



DISPUT

COMPOSET A NEVEZ

ENTRE

UR C'HERE,

HAC

UR BOTOER COAT.

Par un ton nevez.

MAR gallan gout ar feçon, e teuin da rima
 Un disput a neve flam, d'en em divertissa,
 Savet entre ar C'here hac ar Botoer coat:
 Pa vent crog en eur boutail int daou pot delicat.

O daou o deus prometet e mige digante,
 Goude formi un disput excellant entrese:
 Un douden vio fritet hac un tam bara guen,
 Hac ur banne da effa en fin ar ganouen.

(6 .)

Mar be glebiet an anchen ar bombard a zono,
 A zilao gant parfeti un darn a resono,
 Vit ho lacât da zisput an eil oc'h e guile
 Ha non pas rima netra nemet ar virione.

Er goan ec'h intentan, eme ar botoer coat,
 E me a zeu da viscan treid an tud dilicat,
 Ha te q'ereer infam, gant ta botoe ler,
 A zigaç ar c'henvejo hac un nombr a vizer.

Un tam eo istimet huelloc'h ma etat
 Evit n'en deo da-hini, pot ar boteo coad:
 Ma rancqe beajerien bale gant sorgello,
 E vent un anter hirroc'h oc'h ober campagno.

Evit prepari'n douar da lacat an trevat
 Eo un dra necesser cavet ur boto coat;
 Ne voeler den o palat er parc gant boto ler
 Ha c'hoas e fell dit laret ne n'on q'et necesser.

Goud a ran eo ar boto coat a gonserv ar yec'het
 Hac a brepar an douar evit lacat an ed,
 Evel ma c'her da redeç er parc gand o vejo
 E scanoc'h ar boto ler evit ur sorgellat.

Pa deui an erc'h, hac ar seorn, hac ar goan calet,
 E rancqo ar c'here paca e vinaouet,
 Ha me doucho an arc'hant partout er marc'hajo
 Ha te a sello ouzin ha digor da c'heno.

(7)

92
107

Pa erruo ar mis meurs hac an nove amzer,
 Da visca an habijo brao hac ar boto ler,
 Neuze na vo istimet netra ar boto coat;
 Ur boto ler da vale a so traou dilicat.

Alies e ranq'es mont da dy ar c'hivijer
 Ha na pe nemet tri scoet pe un tri scoet anter,
 Ha me laca assambles bete c'huec'h ugent scoet
 Da brena ar c'hoat boto evit ar baysantet.

Goel a ze dit, ma mignon, pa deus ur bern arc'hant;
 An neb o deus nebeutoc'h a vev honestamant.
 Me a deb q'ic ha zouben ha ma yod da greis-de:
 Ordinal ec'h intentant on bevet couls a te.

Poent eo din finissa rac an nos a dosta,
 Hac an hostis a jeno pa na effomp netra,
 Hac a roi din hon c'honje, coader ha q'ereer,
 Da partian deus he dy ha mont da gaet ar guer.

Ebars en hostaleri e ve rezonio,
 Disput entre ar vignonet ha chass-bleo avecho;
 Ar c'hoste cre a c'hone ebars en beb affer.
 Mar q'eres ni a velo, eme ar c'hereer.

Goude leis cov e crogjont vel daou ghy animet
 Ha stagan d'en em gannan evel tud malisset,
 Q'en na ranq'as an hostis q'emer e vas ribot,
 Ha sq'ei voar zin discregui en feçon ma oant crog.

(8)

Goulennomp eur chopinat d'en em dispatia :
 An hostis hon servijo mar deuomp d'e bea,
 Hac evomp pep a vanac'h e fin ar ganouen;
 An oll a ranc caout boto pe vale diarc'hent.

An hini en eus rimet an disput dilicat
 Savet entre ur C'here hac ur Botoer coat,
 En eus gret meur a hini, e hano *Yan ar Goen*,
 Hac a veler ordinal en fin ar ganouen.

FIN.

E MONTROULEZ, e ty V^r GUILMER, Imprimer-Librer.
 Guech-all plac ar pesq'et, breman ru a Aiguillon,
 hac e traon re Sant-Malani.